

Plijabrezh !

Tolpet eo razh an dud e Brest
1, 2, 3, bremañ omp prest
Daomp kuit doc'htu da heul ar vazh-test

Treizomp Bro Leon, ale, dait er-maez
Da ambroug ac'hanomp betek Montroulez
Redek asabl, 'd eo ket diaes

Degouezhet kourz e Bro Dreger
Bro Sant Brieg zo just àr-lerc'h
Dalc'homp, dalc'homp evit hor yezh

Kuitaomp Sant Maloù ha daomp da Roazhon
Huchomp, kanomp betek Redon
Ha razh an dud get ar mem ton

E-kreiz an noz e Naoned
Dihunomp an dud, redomp bepred
Treuzomp ar mor betek Gwened

Ha bremañ e Bro An Alre
E redomp-ni, ar vugale
Plijadur 'vez genomp bemdez

A Lannarstêr da Bleuwigner
Ha c'hoazh betek Kêr Logunec'h
A-hed an hent e raomp-ni berzh

Bourraploc'h eo c'hoazh redek e Pondi
Ale, ale, dait genomp-ni !
Ar Redadeg a di da di !

Troi(ad)où diwezhañ adal da Garaez
Fiskal an hent, brav ar Gourenez
Betek arru e Douarnenez

Ur mor a dud asabl é redek
Na bourrus eo ar Redadeg
Bebet, bevet ar Brezhoneg !



Redadeg !

Dait genomp da redek,

Redadeg !

Evit ar Brezhoneg.